

# Labour hon gouarnemancho koz

1

Arog ar brezel a memp gouelt ar gouarnemencho  
A chéri tout a arhent ag a verzan ar vro  
Ebars eur bloa aeis a treigond mi gred a memp gouelet  
A voant bet bars in Munich e cavet ar bochet.

2

Ag eben eur bloa goude ar brezel oa declaret  
Pa voa prest an Ottro Hitler gand i oll soudardet  
Gered oa tout an armee duze barz ar Belgique  
Nemed unanic benaket a na gallet dont kuit.

3

Evel eur vanden louined oant kasset da Allémagne  
Ar pennou bras oa deut guer da evou ar champagne  
In pad pevar bloa enter hint bet enan a iun  
Kaeite oa aotronez kaer ahober o fortune.

4

Kar goud a red kenkouls a mi ganta converz zo bet gret  
Ia ebarz nom varouz ni gand a Allemanted  
O tout ar boissonniou mad barz no horff zo bet ed  
Evid ober ar casse croute o gand a uio frited.

5

Payet oa a occupant pemp kant million bemde  
Da zevasti dimp om bro a lahou om bugale  
Tannou a lahou reond lec'h me oa patriotet  
A hoas a lared fed die e oa gentille ar bochet.

6

Med eur equipe eoa in Vrance eoa ive payet  
Da versan ar fransijen na da allemantet  
Eur equipe oa dreaze hanvet oa gand Vichy  
Ag o halon a no hreis a nom hever oa cri.

7

Lakat privou ar vugale duze barz ar herio  
Evit ober o fortune a kargan o godello  
A hoas teuont da veprisan a republicanet  
O car goud mad a reont ar lezenou vo chanchet.

8

Car na neusket a rezon evidomp laboureirien  
O meumez ruin oar an douar hober profitourien  
Bep zul kent dar vord ar mor ia gand o hotauo  
A memp a ve an esclavet da labourat ar parkou.

9

O nag a lardan louined ag a chéri an ed  
Settu aze an difference zo tre an dud oar ar bed  
Ar laboureirien a hamp a zo tud a valchance  
Pad ar brezel na namp netra na petrole na essence.

10

Soignet a vije ar louined bemdea hep goulo.  
Kaeite a ve aotronez ker a hoari ar harto  
Ag e spen an draze hoas o duman barz in ker  
Deuz an noz ve allumed ia dimp ar golleer.

11

Sclerigened a ve dimp kasi tout a ruo  
A houia ve oar ar mez a patogi ar poullou  
In pad ar brezel allies an otro vije ket kontent  
Gasec'h ket traou oalc'h a draou da ravitaillement.

12

A hoas e voant soutenet gand ar gouarnement  
Car allies barz kreis ar feurme a houle chanchement  
Na gavint ket oa ker a oalc'h o nan a verreri  
Patto sec'h ag an dour sclair zo mad demp da zibi.

13

A settu aze penoz a homp ni kemeret  
Ar labourerien a hamp o gand an aotronet  
Med mar ve accepted dimp breman a republique  
Ar paour no i zroajou kenkouls ag ar pinvic.

14

Dindan a noblicite ag a tresoump pevien  
Ar laboureirien a hamp eoa esclavajourien  
Ar paour barz in amzer goz ne oa mad da netra  
Med da labourat noz de ebarz ni doul da soucha

15

Kasset vijem da labourat rog a vije sclair an de  
A bet on hober ma hunan evit deg guennec bemde  
Med me na ranket kals a fout na na nonket gened  
Car pension a reo goz breman a vo touchet.

16

Ia pension a re goz breman a hamp da gad  
A laket a re yoanc do tro da labourat  
Car na neusket a raison na mimp barz nom gosnie  
Da leusken a re yoanc da jalavandourie

17

Sort ar labourer pelzo a gleche bean goelet  
O penevete om bro dimp a zo bet goerzed  
Ruinat a he bet om bro o ia gand ar brezel  
Evit harz ar labourer da zond da non zével.

18

Dismanted ve ar arhent dober ar brezelou  
A lech impliou a ne o da dressan a nechou  
O settu aze labour om gouarnemencho  
Lakat a arhent dor brezel evit ruinan ar vro.

19

Evit delhen a hamp tout o ia barz ar vizer  
Med non contenti a ramp gered a zo paper  
Nemed houï tadou a mamou non lakat da comprenn  
A homan na neo ket kin nan eur vuez da renn

20

Sonjet barz o pugale pere zo a zével  
Ma vefe red de mont hoas o dober ar brezel  
A viskoas a larfet di a zo bet brezelou  
Med da hortos darbevien a ve torred o gueno

LE GAC René.